

TESTAMANT AR VAM GOZ,

DEVISET E FEDER G'ENTEL.

Q'ENTA Q'ENTEL.

Detiz mat deoc'h oll, compagnez,
Pa zoc'h en em gavet assambles;
Pêvar bloas antier a so breman,
Aboe m'o quelis divezan.

Pell so oc'h eus clêvet lavaret
N'en deo netra map en oalet;
O vale hac o pou men dre ar vro,
E ti-ger cals a secrejo.

Guechal pa san bianic var brec'h va mag'ereh;
Mar emeus soach em boa peder Vestres:
Unan em boa e Guengamp, un all e Landreg'et;
Un all e Brosaos, marc'h un tabiêr mezer.

Un all am boa e Gouelou, ar plac'h a condition,
He zad a voa aotrou, he mam a voa itron,
Hac hi a voa demezel, cac ouспен pèneret,
Mes qent ma is d'he gu let, e voan pedet alies.

An hini a Voengamp am boursuive cruel
Da ober outi pe otramant d'e lezel;
Qercouls e voan poursuivet gant hini Landreg'et;
Bemde e receven a Vrosaos liseriou,
Ha bemde messajer a escopti Gouelou.

Erfin, pa voan en oad demens a bemzec mit,
E voan importunet ha tentet qer scuis,
Ha me recommand deze donet dar foar da Runan;
Pa o guelzen ho feder ma qemerzen unan.

An hini a Voengamp am abrasse,
An hini a Landreg'et am cherisse,
An hini a Vrosaos a zigaste ganti
A bep sort coanteri evit ma deceva.

An hini dious Gouelou a ouele, a zeplore,
Pa na garen trei outi, lezel ar re all a goste,
Neuse e voan rehet qer scuis o vale dre ar foat,
Gant ar merc'het ous ma heul eg'is peder anoar.

Ha me sonjal caeroc'h abars gemer unan,
Ober un invantion o laqat o feder en unan;
Neuze e voan biavic e qichen va mestres,
Mont a ren ganti en he godel bemdez da blaç al lèz.

Un devez dreist ar re all b vonet da Voengamp,
Aruout ur c'houpl lapoucet e qichen va mestres coant,
Ur fiouter fin demeus a Gerabes,
A droc'has e godel dious brôs va mestres.

Me voa ponneric evidon da veza bian,
Mes al laer a voa dierc'hen hac a reas buan
En ju all d'ar vallis gent ma sellas,
Pa zigoras ar godel, tromplet en em gavas.

Hac, en qer buan ha va teulel eno,
Biscoas qement all a yez n'en devoa var un dro;
M'em bea qeus em c'halon dar marc'hat am boa grêt,
O velet ar peder se en ur pez laqêt,
Ha me da foeta bro treze douar Guenet.

Ma voan pêvar blas just ep dont mui d'am bro,
Ha me laqet forestour var Forest Coat-Zalmo.
Un nosves dreist at re all en em gavis divezat,
Aruout Guillou ar Bleiz ha va lonqa pen ha mont.

Ma voan en e gof diou nos ha daou ze,
Epad an anizer ze ec'h aruis em c'hontre;
Gant ur c'hos contel a voa g'ehen e troc'hen pezlou
A zoul e madren evit ma veljen goulou.

Neuze e voan laqêt er g'er da zioual ar zaout,
Em boa peder danvat, ur vioc'h hac ur maout,
Em boa peder bioc'h lèz hac ul loeic bian,
E vizen casset d'o dioual en hent-bras va anan.

Ar vugale vunut, eve ma ouzot'h erfat,
 ha ve yen an amter en em laqa da eoliat;
 de voa' vat an hent bras etreze a Voengamp,
 hac aruout g'onen ur certen plac'h yaouanq,
 hac hi gonien diouzin da biou e voan tad,
 ha voan ur bug'et yaouanq en devoa fêçon vad.

Mes n'ean get den adret, den habil ha den fin,
 ha e c'hlevis o parlant e comancis c'hoarsin;
 ha me lavaret dezi un dra ne vquien get,
 da g'enta merc'h pe vap o po mar qeret depordet.

Me voa pemp blas-anter, prest da vont em c'hoec'hyet,
 ha sellet ous e bisach ha sellet ous e g'enet,
 ha me lavaret dezi dre gomzou admirabl,
 ha vizen daouzec vlas, evel nen don get anter,
 ha ne reqetse an enor da veza ho servicher.

Hac hi pa glêvas se, azea em c'hichen,
 ha ur guir curiosite da diada' va fenn;
 hac hi lavaret din ebars e ber gomzou,
 ha renqsen quitat va zaout ha mont ganti d'e bro.

Em c'haseze da ur plac' da veza disqet mat,
 ha ueli cals evit na vizen gant va mam ha va zad;
 ha me mont ganti neuze etreze Poullaouen,
 ha c'h u'em boa conessanq nac anaoudeg ous den.

Mes eno e voan conduit ha mag'et difripon,
 gant bara brên, souben dour, coc'h qi, q'ignen, ognon;
 ha voen ta mag'et seis blas qer coantic en he zi,
 neuze e voan daouzec vlas, poent bras da zemezi;
 hac hi da glasq ar person evit dont d'en ober,
 Me respontas ractal e latin caer ha scler,
 an cil g'er eus va *Fater a so hanvet noster*;
 evit oc'h ini, person, biscoas na exercis,
 evel ne doun get bet biscoas en ho catheqis.

Hac en goulen ouzin ha me vise contact

Donet da zemezi brema souden vatant ;
Hac e rose din ur plac'h coant da gousquet gane
Pa vise yen ar gôan da doma va goele.

C'houi so ur goël bipi, a gont din cala a dreo
Demisi un den yaouanq n'ousoc'h a belec'h eo ;
Me lar dêc'h franchamant na zemezim get c'hoas,
Qen na vezo va mam pe va zat var ar plac.

Ar person pa glêvas da scrifa ul liser,
Ha me qemer pen an hent da vont tress ar g'er,
Ma teuas ar vrac'h var va lerc'h,
Da goms din evit he merc'h.

Clêvit, emezi, den yaouanq,
Retournit, ha ne vezit get feneants
Mai qerit retorn c'hoas d'am zi,
Me rei moyen d'oc'h acordi.

Ma carac'h retorn c'hoas ur vech,
Me reiô dêc'h souben al lês,
Ur beren brein, un aval fall,
Na rofen da hini ens va bugale all.

Penos, emoun-me, ha c'houi so dall,
Gant ho souben, per, aval fall,
Gant ho yor qerc'h grêt gant qig sall ;
It, it d'ar gzer, man ar burzudou,
Grac'h cos, eru ho fri en ho qinou ;
Lavarit d'ô merc'h en em gonsoli,
Me nè ran get a gas anesi.

Ma teuas un ozac'h a fêçon
Da c'houout petra voa ar rêson
Penos, emezàn, mic'hiac,
Disêçon bras e parlantet
Ous an hini en deus o mag'et
Seis blas antier bars en e zi,
Ha c'hoas contant da zemezi.

It d'ar gar, c'houi, va mignon,
la spaza ho caz dindan dastou,
la gretac'h qet din lavaret
Dirac den honest ebet,
ec'ha ma fri, eo ven mie'hjec.

Mes eus ho fri e man pateren ho mam-gor,
Iac bi o vrania gant an avel evel ur c'hloc'h,
Iac en dai gar pa glêvas va c'homson,
Ia me qemer pen an hent da vont treze va bro,
an nos a aruas ha me da c'houlen lojan
Ia ti un otrou bras eus e vreg e-uan.

Pa antreis er pors e voa'n itron var an treuziou,
Ia me d'e saludi ebars e ber gomzou,
Ia me goulen diouti ha me vise lojet,
Ia voan un den yaouanq ne vouien pelec'h monet.

Hac hi goulen diouzin piou a rêt ac'hanon,
I bez quartier e voan ha demeus a be bro;
I'houi zo un den adret, ho fêçon a blij din,
Q'it m'o po bolonte ec'h allit chom em zi.

Me so mab da ur Baron, demeus a Vreiz-Izel,
Iroc ur Brincez vras emeus renqet tec'hel,
I'ini a falle dezil va c'haout evit pried,
Mes n'oa qet d'am grêt hac e meus-i refuset.

An aotrou voa deus cec'h a deus d'am saludi
Gant ur galon joaüs hac en ur vousec'hoarsin:
Antreit, den yaouanq, ha deut da dal an ran,
Ie a meus teir vasc'h coant, hac o pezo unan.

Ha me en em gaout neuse terrupl bras marc'redus,
I veles voan en em gavet en ur plac qen danjeus;
Iac an nep o deus c'hoant da viset ho goerc'hdet,
I'arbat e dezo chom etouez ar marc'het.

Q'ent monet da gousqet e c'houlennis conse
Da vont emés ar pors da ober eur bale;

Pa gavis pen an hent ha me comanç da redec,
Ha caout e ur marc'h mat pehini a voa dibret.

Pigna' ris var e g'ein ha d'ar galoup d'ean bro,
Marc'h Hamon foul-t-biscoas na c'has qer bras en dro!
P'am boa tremenet Goengamp, aru tal Kerahes
E rancontis ur vrac'h gos o vont e qar gant lèz.

Hac hi goulen diouzin ha me am boa guelet
Yan-Gornec, he goas, o vont aroc gant ur s'hat ed;
Ha me'o respont dezi em boa guelet ur goas
Gant ur zæ lien-melên basou zei bragou bras,
Ha gantan ur plac'hic coant, na cesse da boqat.

Ar vrac'h pa glêvas se foeltra he fodat las,
Trouça he bros, he invis var peñnou he diou les,
Hac hi comanç da redec etrece Montroulez,
Va marc'h a yas ganti, me dar'gær var droat compes.

E I L Q U E N T E L I

ME a so un dijentil eus a galite vras,
Va oll ditrou so sc'rfet na gant avalou pods;
Va zat oa ur princ' puissant a enezen Callor,
Hac a fraillas e oll zent gant patates ha yot.

Va zat ous ma c'haret un deiz a laras din
Qemeret e vates p'am bise c'hoant demezi;
Honnes a voa unan demeus ar barfeta,
A oufac'h da gompren birvigen er bed-ma.

Ha m'o pe paourente, emezan, gant ho pried,
Deus cals a d'fuachou e viot divorc'het;
Nep en deus comanant, douar feurm ha leve,
A be contribution da herceptour e gontre.

Nep a sent ous e dat o deus bodleur peuryuia,
Me eute ar c'hoatrel, ma tanqis sortie;
Lavaret a rit erenn en ur gl'ir franchamant,

Biqen ne razen ze gant va c'honsantamant.

Guell e vise g'enén en ur g'ir quitat ar vro ;
 Qent ma rasen ar rol pa ne devoa madou ;
 Ha me neuse souden qemer hent bras Paris,
 Biscoas en nep tachen assur ne arétis ;
 Guell e voa stoqet va fén ebars er vezen bellàn ;
 Ha me chom ego neuse souden da denna va halan.

Pa voan eno eta ur poulsat reposit,
 Ec'h aruas ganén eun qzac'h dilavrec,
 Hac én goulén d'ouzin a belêc'h e teuen,
 E ranqe caout va bragou, pe e foelaje va fén.

Setu me ta contraignet ac'hano da dec'hel,
 Ha me mont da ur baros hanvet Cavelpenportel ;
 Ma chomis ego neuse vardro daou pe dri mis,
 Da zisqi scrojoù micherou e peb glis.

Me zo eur mestr micherour, mar deus en escopi,
 Evit bber rochedou, boutou coat, peseliou, podou pri,
 Ha menuser e mein, ha maçonere coat.
 Gour prena ha guersa a ran e pep marc'hat.

Afronti ar grages, trompla ar varc'hadoures,
 Biscoas diner custom na baes e nep lec'h,
 Davantech a oun c'hoas, pa ve un amitie
 Aman etre daou zen e form'a garante.

Hennes a so eur secret hac a so dificil,
 Hac euit er gousout e ret beza habil ;
 Rac cals a dut a so pere na ouzout qet
 Fin na commançamant demeus an amouroustet.

Yaouanqis so friant, cosni a so noasus,
 Ma vent daou demeset e vent bepret marc'hadus ;
 Va amitie so bras en andret ar merc'het,
 Mes ive an nep a gar a verit beza caret.

Rac-se eta e pedan gant guir humilite
 An ancou d'o lipat ma nam c'heret ive,

Ar flana pobl a voe biscoas er c'hartier,
 Setu ama Yannic ar vil vicher
 Zo deut evit o quelet gant gair humilite,
 Hac er memes amser ar vro hac ar c'hontr.

Me'meus disqet evit va bouet
 Ar pe biscoas na voa sonjet,
 Da g'enta ezoun gemener,
 Mestr a lestr, ramoner, qere ha qivifer,
 Calvez oun hac ive maçon,
 Rincer ar privenzou hac ouспен-ze, mitron,

Gant art aritmetiq has an negromanci,
 E ran en un istant eus a zaou ober tri;
 Disqi a ran ive secrejou d'ar grag'e,
 Da laza laou ha c'hoën ebars en ho gable.

Selaouit, merc'het ha grag'e,
 Ar reb o devez laou ha c'hoën en o guel,
 Me zisqo deoc'h eur see:et
 D'o laza oll mar qeret.

Ret e d'ec'h d'erc'hel ur c'hoanen du,
 Laqz en he diouscouarn eur palevas ludy,
 Hac he foueta dre ar pel,
 Qen na saillo en he rastel.

Neuse e commanço da yudal,
 Hac e teuyo ar re al da fringal;
 Ha dre ma teuint var an dro,
 Gant al lude-se en o dallo.

Neuse ec'h aller o lasa a doillou pistolennou,
 Hac ober eus ho bouzellou silzic, goadeg'annou;
 Me voar ober crampoës ha yot gant patatez,
 Ha laqat ar merc'het da stotat ep paoues.

Labourat a ran er jardinou,
 Ha falc'hat ive dre ar prajou,
 Ober un arat gant ar grac'het,

Hac ur e'bar a la malbroug gant lostou c'huilet.

Gant treid siliou sorseresou a raon,
Laqat an dour da redec ouc'h an traon;
Davantach ez on diviner,
Bepret e venn caet var ar mæs pe en kær,

Goud a ràn ive ober croeyou,
Ober guersidi gant treid saout pe loeyou,
Butun scaferlati, jigoden gant hilin,
Ha laqat ar merc'het bepret da stotat guin.

Gori a ràn ar forn gant erc'h,
Ha forci ar merc'het da redec var va lerc'h;
Stoufa ar forn gant aman fresq.
Disqi ar grag'e da vrasesi an esec'h.

Redet emeus tout an departamanchou,
Da zisqi rismadellou ha cals a dalanchou,
Pere so profitapl d'ar grag'ez peurvuia,
Ma qeront o disqi ha laqat o fublia.

Da g'enta ribota ha cresqi gant d'our al læs,
Hema so ur secret ha n'en deo qet dies,
Nea va c'huden hac ober va deves,
Dansal hac ebata ha cousqet alies.

Ispicial ar grag'e hac a fum un nebout,
Ur secret da viret ober tan hep qeuneud;
Capabl oun da ober tout ar pezh a garàn,
Ha gouzout cals a secrejou da espern ar bara.

Pa ven biqen e contàn
Gousout a oun mui evit na lavaràn;
Qement tra a so tout a ran nemet brag'eyer pri,
Mar qerit va c'hredi ha va c'honsideri.

Un aval pa ve meür a ve poent e debri,
Pa oun dent en oat poent e din demezi:
Rac-se noblanç ha paysantet, goaset ha merc'het,
Ebars am brasa anqen m'o ped va sicourat.

Ur vestres eoant ameus en he zi o cluchan,
 Zo hir ha ber, ha teo ha moan,
 Hac a fel dei dre fors ma c'havet da briet,
 Nemedi qet d'am grat, na ne goulennan qet.

Gouscoude e devezs fêçon vad,
 En he fri so tri droatad
 En he daoulagat tri raouen,
 Ha peder just en he dent.

Evit he g'enou charmant so terrupl dereat,
 Nemet betec he diouscouarn ne bad,
 He sellou a so attirant,
 Evel ur bern coc'h en ur pô-t-cam.

Elec'h na ve hini nemerti
 Ar goanta ê, mar credit din;
 Pa na gomsan outi avichou,
 E ve qeit he musellou.
 Evel lost ar c'has var an treujou.

Ar plac'hic-mâ pa ya d'an danç
 A so leun a gouseganç;
 Qer qare eo hac ur varigen.
 Croug'et e ven qent ma e c'haren.

Compagnunes, mar em c'hredet,
 Me a so bet teir guech demeset:
 Da g'enta em boa ur plac'h yaouanq,
 Hounes na voa na vil na coant.

An eil a voa un intanves,
 Ha na voa nag ês na dies,
 An disde a voa ur gos grac'h,
 Na ne voa na clân na yac'h.

Er bla qenta ma temesis,
 E voa meularjes er c'horais;
 An gil bla ma voan demeset,
 E voa ar Pasq bras da Nedeles.

D'ar Rouane e creis an ân,
 E temesis ar vech divesân
 Da ounez côs ur bla ha cant.
 Ne voa en he fên nemet un dant,
 Hac e sonjen e voa yaouanq.
 Tromplet voa va speret gant he g'enet,
 Monet a rân d'ar gar de guelet.

TREDE QENTEL.

SELAOUT oll, tud yaouanq,
 Comsou meurbet divertissant
 Evit recrei 'bô speret,
 Mar bec'h gant nec'h tourmantet.

Un den yaouanq eus a Dreg'er
 En deus laqet an dra-mân var bapet,
 An tenor demeus e vue:
 Darn anezo a so g'eyer ive,
 Ha darn all a so guirione.

Bonjour ha joa, va mignonet,
 Pell bras so nemeus o quelet.
 P'o quelis a boa na voa de all,
 Me so ive eur senechal.

Ne gretén qet em anavesac'h,
 Gouscoude ezoun map dar vrac'h,
 Me so mestr Pieres an Dourdu,
 A ra brigen gant guinis du.

Va zad so Charles ar C'hornardon,
 A spaz ar c'has dindan daston,
 Va breur a so an otrou Gont,
 C'hoar va mam so va moereb, breur va zad so va ydat.

Giles Parafaragaramus; è va hano mat,
 Va lëshano è Cocoricocat;

G'insidie a escopti Treg'er ha Leon,
Credi a rân ouñ natif eus a baros Croson.

Me so un den a gondition,
Evel pa ven, mab da eur baron,
Qender-gompes da Bipi Lichibonic,
Breur-caër da Lustucru ar Pinvidic.

Credit mat ezou-me un excelant barbier,
Rac breur caër ouñ ive da Yan ar Rasouer,
Hac en deus qerent a gondition,
Etoues ar saout, an devet, al loeou, ar c'hochea.

Lusureg'es ha pep sort dieg'i
A scuis ganti guell e pep ti,
Jujmet daenbris côtes môtes fariotes
Rusmali gouloudren farionibinetes,
Nep a so diarc'hen ne gollint qet o botes.

Tud jestil, noblanç ha paysantet,
Eus a greis va c'halon me ho ped,
Na vanqit qet, va mignonet, brema,
Ds zont ganeme ha re-all da goania,
Evit gant plijadur recrei ho speret.
Pep tra vad ameus a bell so preparet.

Grêt emeus rost gant diou guespeden,
Pévar gartier-azon hag ug'ent qellienen.
Ne dorot qet ho tent e crignat an esqern;
Traou delicat ameus gant hast bras clasqet,
Ha traou lipous estlam, dificil da gavet,
Treit siliou, discouarn builet ha coc'h qesec.

Ouspen evit an dessert ameus cavet,
Qerniel c'hoen, ul louarn besq, ur c'hat lostec;
Ne gafet qet cals a dut fur
A gafe ar remañ dre natur.

Ur saladen ameus ive clasqet,
Déliou linat ha re alec;

Nen' deus qet a guinegr nag heol gante,
 Mes dour beol a so larg'ente.

Compagnunes, vā excusit, me ho ped,
 Pac evit-servicha certen na onson qet,
 Qenta gentel am boe biscoas
 A vōe scritet gant avalou poas.

Ha na zesqis memet diou liseren
 Adalec va lein bete va meten;
 Hac e larent oll din ar scolaerien,
 Biryiqen ne rajen nemet ur vouriqen.

Ar vagabonet-se a voa inoçantet,
 E laret un dra na ouient qet;
 Gouscoude e voan seis sisun pe eur mie
 Abars biscoas netra ma oujis,
 Pini a voa anaout pen an asen,
 Qender-gompes d'an oll dut scolaerien.

Racse na vetit qet den soueset,
 Cals a dut a vez alies tromplet,
 Gant eur c'hravast hep monet pelloc'h;
 Nen deus netra tout er bed-mañ dificiloch.

Mar gousoc'h ar fêçon, respontit propr,
 Ha lavarit pe ben d'ar c'hravast a ya aroc;
 Serrit ho qinou, pa ho pedân,
 Brémàn ar guel studia a rân.

PEDERVET QENTEL

Ouc'h nac'h dibales dious Paris,
 Lantiguen eol decot ilis diflo
 Evit al latin-mâ ne eulentet qet,
 Selaonit oll e bresennec,
 Hac e clefot e ber gomzou
 Publia an ordrenançou.

Un ozac'h c'ôs a Boullaouen ;
 O vont d'ar foar da Rostrenen ,
 Da anter Ebrel e mis Even ,
 Etre unec heur ha creisde ,
 E c'hanas daou a yugale.

Qenta mab en devoe voa Yan Farioqin ,
 Ur gourmand infam sroter er vassin ,
 Zo bet e Paris o tesqi an nigromanç ,
 A eston an dut sot gant cals a eloqanç.

An eil qent ma voa deut er bet
 Ne voa qet c'hoas ganet ;
 Hanvet voe Yan al Lorenhec ar pot fin ,
 A voe grêt Sacrist e bourg Plestin ,
 Ha baræer en departamanchou .
 Lehini en deus grêt ordrenançou
 Ma renco an oïl merc'het vaouanç .
 Da lavaret eo , neb a zo friant ha coant ,
 Mont gant ho mignonet d'au arme ,
 Ha da gousqet bemnos gante.

Rac-se , merc'het va bro . enem depechit pront
 Ha deut da boqat din pa vezoc'h prest da vont
 Evel amazonet da gaout ho rejimant .
 Da lipat ho rouiq a zo potret vaillant .

Peder pe bemp plac'h a Baris
 A deuas d'en em glêm dre valiç ,
 N'oa qet avoalc'h evit pepini eur goas ,
 Daou pe dri n'oa qet re , na memes davantaeh .

Pa ezont dirac ar roue ,
 E leversont ar franc virione :
 Fidel omp , emeze , d'ho lezen ,
 Accordit deomp-ta , hor goulen .

Neuse souden voe grêt commandamant
 D'ar merc'het diyalo hag ive d'ar re goant .

Da vont d'ar gêr da zebri o c'hoan pe o zijuoi,
Ma ne falle get de passeal gant peb a hini.

Merc'het yaouanq Costes ar Nord
Zo casi peurvuia eon pe dort,
Ha re'n departamanchou all, couls a re Finister,
Zo ordinal soupsonet da gaver boutou ber.

Potret yaouanq va bro, gout a ouzoc'h
Penos merchet Lanneur, Plougaznou, Plouezoc'h
Plêgat, Sant-Yan-ar-bis, Plouyan, Plourin, Garland,
A renqo coust pe goust-cousquet gant pep a unan.

Hac an esac'h hag ar grag'es
O deus avertissamant ives
Pa viont squis da zisquisa,
Da sench ha da zispantiz:
En Oriant, en Henbont hac e Pontivi
En deus checchet meur a hini.

An dra-se evit esamant ar vro,
Setu aru mis Guengolo,
Erru foar ar Troqerevou
Da vouel Mazg var mene Brez
E troq an ezac'h hag ar grag'ez,
Nep a so squis gant e bar.
Laqit al liceu en e fen, hac it ganti d'ar foar.

Tud gentil, noblanç ha paysantet,
A greis va c'halon me ho ped,
Mar ben get frajil d'oc'h ofansi
Gant ur goms drouc-lavaret, mo-ped d'am excusi.
N'en doue get un den en dese studiet,
Hac a velfe a bell an traou a so cuset.

Bian e va speret, bian va heritach,
Testamant va mam gos a vo va oll bartach,
Hounes a laras din dre gomsou excelant,
D'ar c'houlz ma voa hi c'os me a voa den yaouanq.
Va mab, na laqit get, mar'qeret,

Mo stil e pep lec'h da re garet :
 Dalc'h va wir g'enet da yalc'h ;
 Ar bleis ma ve demezet a zeufe don' aoualc'h.

Benos Doue d'an diner ,
 A ra e hostis e pep qer ,
 Gallec ha brezonec a oaf ,
 Hac ober e hostis e pep foar :
 An amzer a ra an hat ,
 Hac an arc'hant a ra ar marc'hat.

Setu amañ Testamant va miam gôs ,
 Pini a dleit lenn hac en deis hac en nos ,
 A voa scrifet pemzec de qeat ma clâvas ,
 Ha dictet tri dez goude ma varvas ,
 Testamant caër , scrifet gant pleus ,
 A so bet alaoutet gant daoulagat pieous.

Composet gant Ustach Toraval ,
 Hac e gonsort Jeromic Kikikokoraval ,
 E gamerat Yan ar Maout , goroer ar zaout ,
 Hac e g'ender Yan ar Zaout , a so mal e gaout.

Nep a fel dezân cavout an Testamant ,
 A renq eta donet promptamant
 Da Voutroulez da di LEDAN , Imprimer ,
 A g'ever en e di pa ve chomet er gar.

F I N .